



AR MEMORARE a zo eun
 Oræzoun miraculus , evel ma
 lenner è buez an Tad **BERNARD**
 à Baris , pehini he recommand
 d'ar béc'heurien evit goulen ho
 c' honversion dre intercescion ar
 Verc'hes **VARI** ; ha meur à dud
 santel a zeu d'he lavaret gant
 eun dévociion vras : chetu - hi
 amàn è brézounec.

MEMORARE.

O Guerc'hes Vari leun à druez ;
 Ho pezit memor, me ho ped ,
 Penaus biscoas den èn è vuez
 N'en deus guelet na clevet
 Ho pige lèzet èn abandon
 Nicun à guement a deuje

D'en-em adressi deoc'h à galon,
Daoust pe guer bras pêc'her vije.
Nan, ne deut jamès da zilèzel
Nep en-em laca gant fizianç
Dindan ho proteccion santel,
Ac a c'houlèn ho c'hassistanç.
Er mêmès fizianç e teuan ivez,
O Guerc'es, mam ar guerc'hezet,
D'en-em adressi d'ho madèlez,
Ha da gaout recours deoc'h bepret.

O c'huanada èn ho prezanç,
Evel eur pêc'her bras ma zoun
En-em brezantan gant reveranç
Da c'houlèn dreizoc'h ar pardoun.
Pa zoc'h ar vam eus ar gomz divin,
Na zisprigit quet va c'homzou;
Mès o clèvet favorabl ouzin,
Va exaucit èm izomou.

Evel-ze bezet great.